

KANNAËDIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 96 Mae - Mezheven 2016 Priz : 3€

“Deuit, va servijer mat, da gaout Doue an Tad”

Sed ar pezh a lavaras ar Vikel-vras pa voe lavaret dezhañ e oa aet eo an Aotrou Troal d'an Anaon da Ouel Yann 2016, da 9 eur. Kofesaet ha nouennet e oa bet gant ur beleg yaouank brezhoneger, en doa olevet daouarn ar beleg kozh, « *an daouarn-se, emezañ din, o doa badezet, benniget ha roet an absolvenn, olevet ar re glañv, sakret ken alies bara hag gwin ar Sakramant...* ». Fromus e oa bet evito o-daou al lidoù-se, a c'heller krediñ.

Ur beleg da Jezuz Krist, ezel gredus da Gristenien Breizh, unan eus hon diwezhañ beleien broadelourien, a zo distroet davet e grouer eta, goude ur vuhez hir : en tu all da zek bloaz ha pevar-ugent e oa Youenn Troal.

E Obidoù a voe lidet d'al Lun da 14e30 e Kombrid.

Bet ganet e 1925 ha deuet emzivad abred en e vugaleaj

– ac'hano, a gav din, e garantez tener ouzh ar Werc'hez Vari, e vamm eus an Neñv - e voe savet en ur familh a gouerien vrezhonegerien e Kombrid, hogen ne oa ket troet da gomz e yezh e vugaleaj. Brezhoneg Gwalarn an hini a gomze, a youl-gaer.


Beleget e voe e 1949 en iliz-veur Kemper hag anvet da skolaer. E 1957 e voe kaset da **Plouenan** da ren ar skol. Eno e krouas ur c'helc'h keltiek, ur bagad en e skol, hag e kinnige beilhadegoù e brezhoneg. Pemp

bloavezh a virvilh, hogen santout a rae ne glote ket tre gant e c'halvadenn a veleg.

Da-heul ar c'halvadenn a reas ar Pab Pi XII en e lizher *Fidei Donum* e 1957 a c'houlenne digant beleien Europa mont da sikour an Iliz en Afrika hag en Amerika ar Su ez eas neuze **d'ar Perou** etre 1963 ha 1968. Lavarout a reas din e kavas gwelloc'h pellaat diouzh Breizh eget dont da vezañ “Beleg an **FLB**”, en abeg d'e vennozhioù broadelour.

Etre 1968 ha 1973, e **Skol an Aod** e Gwiseni evel aluzenner e kenlabouras gant **Visant Seité**, en e gevredigezh *Ar Skol dre Lizer*. Mignoniezh a oa etrezo daoust da afer vantrus skritur **Ar Falc'hun**. Ma n'en defe ket pleget Seité da Patrioted ar Skol-veur, o dije «*Torret va brec'h din*» en doa lavaret Visant Seité dezhañ. D'ar mare-se ivez e

voe e derou [Oaled ar Vro-Bagan](#), a oa ur seurt patronaj e brezhoneg er penn-kentañ, hag ivez e rae war-dro ar gelaouenn «*Wanig ha Wenig*», evit ar vugale hag e kemeras perzh un tammig e troidigezh *Kenvreuriez ar Brezoneg* evit al liderezh e brezhoneg goude Vatikan II. Buan avat e chomas a-sav pa ne oa ket donezonet ha m'en em gave unanetoc'h a spered gant “**Beleien Treger**” : Mab speredel da Varsel **Klerg** e voe, ha galvet e oa bet gantañ, ha fiziet en doa neuze kalz dielloù ennañ, en o zouez e zornskrid eus ofis al lennadennoù a zo bet



moulet endeo gant Imbourc'h e daouzek levrenn.

Etre 1973 ha 1979, e tistroas d'ar **Perou** en Ayaviri, 4000 metrad uhelder. Met **teologiezh an "Dieubidigezh"** ne-z ae ket dezhañ. Fellout a rae dezhañ chom feal d'ar Pab. E eñvorennoù eus e droiadoù er Perou a voe moulet adammoù : er gelaouenn **Al Liamm** e 1965, ha goude-se e meur a levrenn gant **Imbourc'h** dindan an talbenn «*Ar C'hrist d'an Indianed*», bet adembannet gant **Moulladurioù Hor Yezh**, e div levrenn (2007 ha 2010).

Er bloavezhioù 80 e oa Person **Plouneour-Menez** en ur presbital dirapar-tre. P'en doa ranket kuitaat e bresbital a Blouneour e oa bet ranket devañ ur bern paperoù a oa aet mouest er presbital-se, na veze ket tommet mat : presnester torret a oa !

Diskleriet en doa ur wech en iliz Plouneour : "*Pas de confession, pas de communion!*", met dindan komzoù reut evel-se (hogen reizh !) e teue a-benn, lorc'h a oa ennañ eus se pa oueze ne gofese mui den ebet er parrezioù all koulz lavaret, da gofes tud c'hoazh er barrez-se a Vro-Leon, un hanter-kant bennak war mil a dud. Meret e oa ar gomun c'hoazh gant ur c'huzul-kêr komunour ha na lakae ket da ober al labourioù en iliz-parrez ha ne c'hellas ket derc'hel da lidañ an Oferenn en iliz-parrez en abeg da se. Neuze e lidas an Oferennoù en... "*Abattoirs Plassart*"...

Gant **Fañch Morvannou** em eus soñj ec'h aozas meur a dro Gousperou kaer an Hanter-Eost en Abati ar Releg, war an tonioù "krampouezh gwinih du" latin, hogen e brezhoneg penn-da-benn. Edo "*en e C'hloria Mundi!*". Chapel sant Divi Plouneour a voe adlañset gantañ ivez. Un deiz, ouzh ar chapel, e voe adkavet an delwenn anezhi a oa bet laeret. Ezel aketus **Kristenien Breizh** e oa deut da vezañ neuze. Kristenien Breizh a oa bet savet d'ar poent-hont da vezañ ur Vreuriezh a bedenn hag a studi, gant bennozh Maodez Glanndour a oa aet re gozh, evit erlerc'hiañ **Unvaniezh Speredel Breizh**. A bep eil gant an Aotrou Blanchard, person Kistinid, e veze emgavioù e Plouneour pe e Kistinid, betek 1993. A-dost en doa ambrouget an Aotrou Troal derou **Tiegezh Santez Anna**, adalek an deroù anezhañ e Landerne e 1988, hag e reas war-dro ar gelaouennig «**Ar Fulenn**» da reiñ boued speredel d'ar vrezhonegerien yaouank a oa endro dezhañ ha Kristenien Breizh.

Ur si bihan en doa an Aotrou Troal. "An hini a lavar n'en deus ket a si en devez tri !". En ur renkañ e bresbital evit an dilojadeg e kavis derou un deizlevr, bet kroget gantañ, war am eus soñj d'ar mare ma voe beleget. Hag e oa skrivet n'en em gave ket barrek da vezañ beleg, dreist-holl abalamour ma n'en em sante ket gouest da sevel sarmonioù a-zoare. Hiviziken, a lennis, e tastumfe danvez evit boueta e sarmonioù, o tidroc'hañ pennadoù kazetennerezh, hag ouzh o renkañ dre zanvez, e rochedoù kartoñs. Tost 60 vloaz war-lerc'h, en e bresbital a Langolen, e oa degadoù a gartoñsadoù bras bet savet gantañ evel-se ! Ur seurt kleñved e oa, moarvat, rak da biv e servijo bremañ ? An dra-se, avat, en doa sikouret dezhañ, sur a-walc'h, da zerc'hel da vezañ aketus ouzh ar pezh a dremene en-dro dezhañ. Lenn a rae kazetennoù e spagnoleg ha n'eo ket hepken ar c'hazetennoù gall, *La Croix* ha *Le Télégramme* pergen.

Er bloavezhioù 1990 e voe person parrez vihan-tre **Treogad** er vro-Vigoudenn. Lavaret en doa din neuze : "*Ne c'heller ket kouezhañ izeloc'h!*". Ul labour uvel a reas eno, kempenn an iliz-parrez (graet e veze 'ar chapel' anezhi gant an dud, hervezañ !). Goude-se ez eas da bresbital **Langolen** e 2002, betek 2015. War an diwezhadoù-se ez embannas ingal danvez e sarmonioù e **Kannadig Imbourc'h**, kelaouenn **Emglev an Tiegezhioù**.

E-kreiz ar bloaz 2015 e oa kouezhet war al leur ha chomet e oa semplet e-pad eurvezhioù. D'an ospital Laenneg e **Kemper** e voe kaset ha goude-se da **gKernizi**, ti ar veleien gozh, tost da greiz-kêr Kemper.

Ezel gredus eus **Kristenion Breizh** e oa bet Youenn Troal, se am eus meneget dija. En emvod-meur Emglev an Tiegezhioù, e Kergreven Trelevenez d'ar Sul 10 a viz Gouhere e vo ret deomp divizout diwar-benn dazont ar vreuriezh-se m'en doa Youenn Troal kavet ganti un tiegezh a gompene anezhañ evel beleg a felle dezhañ chom feal d'ar Pab en amzerioù trubuilhus a vevomp en Iliz, hag a gompene anezhañ evel broadelour a felle dezhañ pediñ e brezhoneg ha kaout ur vuhez kefredel uhel e brezhoneg : ezhomm en doa da gejañ gant tud unvennozhañ gantañ war boentoù ar Feiz hag ar Vro. Daoust ha tud evel-se a garo, eveltañ, gwech-ha-gwechall e-pad ar bloaz, e lec'h-mañ-lec'h e Breizh, en em gavout gant beleien ha laiked, a-benn chom fidel d'ar bedenn ha chom spiswel dirak an darvoudoù, ha kement-se holl e

brezhoneg, tre “*e linenn istorel Breizh*”, evel ma lavare ?

Bezef pe vezef, salv m’e gavimp un deiz e Baradoz an Aotrou Doue, gant ar fulenn a valis dizrouk a gavemp a-wechoù, en e zaoulagad, ha fent an den, ha douster e vouezh... pa gomze deomp ! Da skouer an deiz ma kontas penaos e vountas dre zievezh gant e Renault Peder-askell, aet kozh-dirapar, a-benn da garr nevez e Vikel-vas, mil enervet ma oa bet gantañ en unan eus an emvodoù niverus ha diziwezh-se ma veze rebechet outañ, a-benn ar fin, chom stag ouzh feiz “*Iliz trec’holidus*” amzer e yaouankiz ! Met an Iliz-se eo, gwriziennet don e stuzegezh hor bro, an hini eo e komzas drezi an Aotrou Doue d’e galon un deiz, ouzh e c’hervel da vezañ beleg, hag “*o fiziout ennañ amzer da zont ar Vro*”, evel ma lavare an Aotrou Perrot.

Ar feiz a salv, Aotrou Troal. Salvet omp dre ar feiz. Salvet oc’h dre ar feiz, hag hor gortozit gant Hor Salver er Baradoz, ganeoc’h en ho torn Banniel trec’holidus feiz karet hon Tadoù-kozh.

Tepod Gwilhmod

Pedenn da Werc’hez an Dieubidigezh

War don Itron-Varia Penhors @

1- Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron¹,
Evit ar peoc’h pedit ‘vito,
‘Vit ar mintin a zo peurfonn,

¹ Puron : *Purgator*.

O parañ splann en o Mammvro.

2-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
Taolit warno ur sell tener,
O renit flour d’al lec’h ec’hon
Da beurvanoù ar Mesaer.

3-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
Ra nijint skañv d’an Ti-Repoz !
Ganto divaskell mistr eston,
O sevel trema ‘r Baradoz.

4-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
O eneoù ‘zo ho preder,
Ho mouezh a zo un trid-kalon,
Ho tremen a zo dieuber.

5-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
D’an eneoù roit frealz !
Ho kweladenn a ro kalon
D’ar re ‘zo gwasket pell ha kalz.

6-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
Ho pennozh war an eneoù
Eo va goulen, va aluzon.
Mall eo ganto mont d’an Neñvoù !

7-Gwerc’hez Vari, Mamm ar Puron,
Kaer eo mervel en ho tivvrec’h
‘Vel ur vleunienn, gant frond a-fonn
O tispakañ, bremañ, didrec’h.

Youenn Troal (*bet kanet d’e obidoù*)

Petra eo ar brezhoneg evidomp ?

Diwar-benn ar reizhskrivadur e sav tabut c’hoazh gwech ha gwech all. Evit gwir n’emañ ket an dalc’h war an dachenn yezhoniell, war an hini politikel ne lavaran ket. Siwazh ez eus un nebeud tud, kelennerien ar braz anezho, a zalc’h mort d’o diforc’hioù dezho-o-unan, diforc’hioù na zegasont netra nemet dinerzhañ ar genyezh. E gwirionez ez int desket mat war ar yezh met soñjal a ra din n’o deus ket prederiet don war o emzalc’h, a zo drastus. Rak kement-se n’eo ket sirius : ur benveg yac’h ha kreñv e rank bezañ ar brezhoneg pe e vo kaset d’ar blotoù da gemer ur benveg yac’hoc’h. Se em eus bet tro da skrivañ dija, pergen e niverennoù 40 ha 50 hor C’hannadig. Tostaat a reomp d’an niv. 100, hag ec’h ouzon mat e ranker adlavarout meur a wech, hogen war meur a don, evit dont a-benn da lakaat un dra bennak da dremen. Neuze ez an

da zistreiñ war ar c’hraf-se eta, petra eo ar brezhoneg evidomp ?

Krign-bev ar geñverelouriezh en Emsav

Ne rank ket hor yezh bezañ ur mirdi troiennoù rannyezhel diniver, e-lec’h pep tra, kement lavar a zo, a vefe kevatal gant ar re all. Soñjal kement-se a zo plegañ d’ar geñverelouriezh², soñjal ez eo mat pep tra, talvoudus pep tra. Evel-just ez eo talvoudus evit ar skiantourien. Met ur yezh didammet eo ar brezhoneg. Emañ oc’h echuiñ ober he zalaroù war ar maez. An didammidigezh-mañ na baouez ket da greskiñ a

² Keñverelouriezh, benel : soñjal ez eo keñveriek pep tra, n’eus tra asur ebet, gwirionez ebet, pe da vihanañ ne c’hellfe ket an den he zizhout en abeg da wander e vez. N’eo ket dav Imbourc’hañ eta, peogwir ne c’heller ket kavout. Gg. *Relativisme*.

zo ur sin eus breinadurezh ur yezh a-raok dezhi mervel. Hogen war ur bern teil e c'hell kreskiñ ur vleunienn gaer, a lavare Youenn Olier. Ar brezhoneg a zo bet goveliet da heul Roparz Hemon a ro ar vleunienn-se. Da heul Roparz Hemon ha Youenn Olier ec'h ouzomp ne c'heller ket kontañ war al luc'hajoù evit reiñ un dazont talvoudus d'hor yezh evit hor Bro. Leun a zoareoù diforc'h 'zo, da skouer, evit lavarout "*Maintenant*" : *hiziv, hirio, hirie, hiziv, hidi, hudu*, ha me 'oar-me ! Goulc'han Kervella, diwar un taol imor da heul ur pennad-kaoz war "[Libération](#)" gant Jean Le Du, a skrivas un danevell fentus war-se e niv. 299 Al Liamm, ugent vloaz 'zo bremañ. Jean Le Du, hag e vignon Le Berre, er PCF o-daou hag e Skol-Veur Brest kelennerien brezhoneg, e galleg³, dindan renerez ar Chaloni patriot Falc'hun, eus Iliz katolik Kemper, o-zri a oa entanet gant ur feiz virvidik a-enep an "nasionalisted", hag a renas o buhez o nac'h ar pezh a zo anat d'ar bugel seizh vloaz, an oad a oa ganin pa zivizis chom hep dinac'h ar yezh a gleven en-dro din e Pluguen : ne felle ket dezho anzav en deus ar brezhoneg ur c'halvidigezh dre natur. Ha petra eo-hi ? An darn vrasañ eus an dud ne brederiont ket war se hogen a-bouez-kenañ eo. Hogen an darn vras a zam-verz ez eus un dalc'h a-bouez, ur c'hleñved spegus, a zo deskrivet mat gant Morvan Ar Besk, «*Dizoleiñ, pe ober fae*»⁴. Lezel ar brezhoneg da vont da goll n'eo ket netra. Un dra ne dalvez ket un dra all. Un ober en deus efedoù, hag an efedoù a c'hell bezañ barnet evel "mat"pe "fall".

³ Bet on bet studier gant Le Berre war al lennegezh vrezhonek. E galleg e kelenne ! Kaer e oa sevel outañ goulennoù e brezhoneg, ne rae van ebet. Ne gav ket din e oa dismegañs diouzh e berzh, met kentoc'h un aon dianzavus da vezañ mezhekaet pa rafe fazioù, ha muioc'h c'hoazh e vije bet buhez gantañ evel un taol treitouriezh ouzh e vennozhioù, peogwir en dije degaset evel-se dour da vilin ar re a stourm evit ar yezh. Kement-se holl ne veze ket diskleriet deomp evel-se, evel-just. Lavaret e veze kentoc'h e oa ar galleg ar benveg dik evit o labourioù skolveurel, tra ma ne c'helle ket an dra-se bezañ graet mat en hor yezh : komprenit, ne dalveze nemet e par ar vuhez diwar ar maez a-wechall, a oa o steuziañ. Ur wech, memes-tra, hegaset, e tisklerias din Le Du n'em boa netra d'ober ganto ma c'hortozen digant Skol-veur Brest bezañ ur "*skol-veur Diwan*", emezañ.

⁴ "*La Découverte ou l'ignorance*" ar ger *ignorance* amañ a zo bet troet ganin gant "ober fae", hogen gwir eo ez eus kalz a dud abaoe m'eo bet skrivet an oberenn-se na reont ket fae ken, hogen kentoc'h "ne reont van ebet", dic'houez-kaer ma-z int, en ur Vreizh e-lec'h n'eo ket ken anat ken an diforc'hioù gant Bro-C'hall, ha pergen ar fed m'eo steuziet-mik ar yezh e-touez an dud.

Gant tro-soñjal keñverelour ar gevredigezh a-vremañ e vezomp lorbet eta, meur a dro : tamm-ha-tamm e vez lammet diganeomp ar gwir da varn an traoù drezomp hon-unan. Peogwir ez eo "mat pep tra": al Lezenn hel lavar. Ar gwir a zo c'hoazh da zibab da wreg, hogen evit matezh an ti n'eus ket, ha pa ne blijfe ket deoc'h ma n'eo ket lesbiadez, pe du, pe komunourez, ha me 'oar-me ! Ur prosez 'po ma nac'hit goprañ anezhi war an abegoù-se. Evel-se e reer d'an dud degemer forzh petra. Ar geñverelouriezh a zo ur c'hrign-bev a vir ouzh an dud da sellout ouzh ar gwirvoud evel m'emañ. Ivez, ar gealiadurezh-se a denn diganeomp ar giriegezh da oberiañ evit cheñch penn d'an traoù, rak ma vije keñveriek pep tra, ingal ha dibouez o zalvoudegezh, ne servijfe da netra foranañ hor poan peogwir e vije aner, bugelek a-benn ar fin ar pezh a rafemp. Bugelek : sed aze ar pezh a soñje Le Du-Le Berre, 30 vloaz 'zo bremañ diwar-benn an *nasionalisted*.

Mennozhiaed treitour an Ingalded

Lavaret e vez "Ingald eo din". Ur seurt keñverelouriezh ez eo. An diseblanted a zo frouezh put an "Ingald eo din"-mañ. Le Du-Le Berre a c'helle ober van da vezañ dedennet hepken gant an dud hag o liamm gant ur yezh degouezhet en arouelioù-diboaniañ⁵, ha kuzhat o bihander dindan ouel o studioù uhel a gevreyezhoniezh⁶. Ar wirionez eo n'eus ket fellet

⁵ Arouelioù-diboaniañ : *soins palliatifs*.

⁶ Kevre-yezhoniezh : ijinet ganin war ar prim. An Ofis a lavar sokioyezhoniezh [bo...], hag hon daou Ar Bras-Ar Braz a lavar "*sokioleñgwistik*"... Erfin, evit an distagadur... em eus klevet amezeg unan, en doa klevet un den, a zo ginidik eus Plougoulougouloum, is-ispializet war ar vicher-se, a ra war-dro "*pissikossossioleñgwistik*", emezeur din, hag e oa ar skiant-se "*interessant-abominabl*" hag iskis penaos e oa "*important evit ar vrai breuton*". Ouzhpenn-se, gant e studioù, en doa kavet traoù. Ya, kalz traoù. Da skouer, orin ar ger "[bolosser](#)" e galleg. Klevet en doa gant e ziskouarn, ha gwelet zoken, gant e zaoulagad, dreist mogerig porzh skolaj Sant Jozef Ploueskad, ur paotr 10 vloaz o resev bolos (prunez gouez) brein war e gein, a-berzh paotred all, a rae goap outañ pa oa un neuz bourc'hiz warnañ, hervez ar skiantour psiikossossioleñgwist, pa oa kouezhet diouzh lost ar c'harr, pe ganet e fin ar sizhun, ma karit., Klevet en doa (hag enrollet zoken, a-drugarez Doue !) : "*On tbolosra tan kiora des bolos assé pourri, pour un boloss kom tôa*". Abaoe emañ o sevel eta un dezenn da enebañ ouzh un dezenn all, sod a-grenn, gant Alena Podhornà-Polickà. Hi a zo eus Skol-veur Masaryk Kêr Vrno Techkia, hag e lavar e teu "bolos" diouzh ar verlaneg "*Salaud/Mon-Salud/Mon-Laus/Bon-Los/Boloss*", a-ziwar ur ganenn rap eus bannlev Pariz a sav da 1995 ! Digredus !

dezho respont d'ar c'halvidigezh a glev kement hini a ra un tamm a-zevri war-dro ar yezh. N'omp ket touellet na bugelek evel ma vez goulakaet ganto ha gant Françoise Morvan a damall deomp bezañ aktourien ur C'hoari-roll, ha netra ken. C'hoant am eus da respont dezho n'o deus graet, en o red-vicher nemet treveziñ penn-kentañ parabolenn ar Samariad Mat, rak ma-z eo gwir o deus sellet a-dost ouzh ar c'hlañvour e-pad 40 bloavezh o red-vicher, n'o deus graet netra evit prederiañ e c'houlioù !

Ret eo din chom a-sav ur pennadig war ar mennozhiaed-se eus an Ingalded am eus diskouezet emañ o kammañ ar meiz, pa-z eo mamm ar geñverelouriezh ha mamm-gozh an diseblanted, a lak an darn vras eus an dud da vevañ digamambre, dilezet ganto o skiant-barn dezho o-unan. Bevañ a reont lobotizet : ma digarezit, diskleriañ splann a rankan an traoù evel m'o gwelan. Evit diskouez un tammig penaos ez omp gouleviet gant mennozhiaed an Ingalded e Frañs e roan ur skouer vihan : ur fars-forn a zo da "ingalañ"etre izili un tiegezh. Ar vamm a lavar e vo rannet gant lodennoù ingal, pep hini an hevelep pouez. An tad, naon bras gantañ a lavar : *"Me 'mo un tamm brasoc'h, peogwir em eus ur c'horf tev da vagañ, eizh ugent lur pouez, hag, ouzhpenn, ez eo me an hini a zegas moneiz d'ar gêr, neketa ?!"*. Ar vugale a respont kentizh : *"Ni a zo treut-gagn, 'welez ket ? N'emaout ket o vont d'hor marnaoniañ, tad digar !"* Hag ar vamm neuze, rediet da zifenn he lodenn, da ziskleriañ : *"Alato ! Me eo he deus keginet ar fars, n'eo ket ? Frouezh va labour eo !"*. Diwar ar pouez a vo roet da arguzennoù an eil pe egile e vo atav tu en ur vro, en anv an "Ingalded" hag ar "reizhded", da sevel lezennoù a lakaio tud da vezañ *"ingaloc'h eget ar re all"*, evel ma lavare Coluche ! An Ingalded-se a goust atav kêr d'ar re wan, hag ouzhpenn e tegas disrann ha rogoni, pa rankfemp bezañ holl e servij ar re all, an nesañ.

Daoust hag ez eo Ingal an holl yezhoù ? Petra eo ar respont mat ? "Ya", an hini eo, evel-just ! Ent-damkaniezhel hag evit ar *politically correct* hepken, ya, bez ez int. Hogen er pleustr n'int ket, avat ! Ar gallaouegoù n'eont ket d'ober ur yezh (er ster boutin a zo gant ar ger-mañ), ar brezhoneg n'eo ket par d'ar galleg : siwazh ! E par ar yezhoù e c'hoarvez forzh penaos diouzh live ar sevenadurezhioù ma aparchantont outo. Hag e bro an Ingalded n'eo ket brav ar stad a reer d'hor yezh, peogwir e oa n'eus ket keit-se

yezh ar gouerien nemetken. Evel un is-yezh e oa, gwir eo, hogen gant Roparz Hemon, an den a vo ret reiñ dezhañ anv ar vali a zo evit poent war anv ar patriot treitour Le Gorgeu, ar vali a gas d'ar Skol-veur e Brest eus ar c'hreiz-kêr, hon eus ur yezh gouest da respont da ezhommoù kempred ar Vretoned.

Kement-se holl a skrivan war an Ingalded a c'hellfen ivez ober kement-all evit an talvoudoù kaer all eus Republik an Droc'herien-c'houzoug. Na vezomp ket touellet gant komzoù-toull hor mistri : ober a reont an neuz met evit gwir ez eo ganto mennozhiaed an Ingalded un arm evit hor c'habestrañ gant gerioù all a vez anvet, ganto ivez, Demokratelezh, Muiañ-niver, Doujañs, Kengred, ha me 'oar... Met ar gerioù-se n'int ket evito. Dindano ez eus kealioù aozet da lakaat ar c'hedveno da dreiñ mennozh, hervez an ezhommoù, ken aes ha pa droer ur grampouezhenn war ar billig. Bez'ez eus ur wirionez na fell ket dezho e vefe graet anv anezhi : ar fed ma n'eus a-dreñv d'o zundalvoudoù diaoulek nemet lorberezh, gwalc'herezh-empenn a-yoc'h, goulevierezh⁷, korvoerezh, lazhadeg ar yezhoù, ar broadelezhioù, an tiegezhioù, ar babigoù, an dud nammet (Vincent Lambert), diskar an deskadurezh er skol, hag all, hag all. Liammet eo pep tra, bezañ nay eo soñjal e mod all d'am soñj.

Benveg ur gumuniezh a dud

Unan a zaou, ur yezh a zo ur benveg a zo tonket, pe da vont da goll, pe da vezañ yezh ur gumuniezh vev a dud. Dibabet he deus ar Stad c'hall evidomp, met n'eo ket evit hor mad.

Ha peseurt kumuniezh a dud e Breizh ? Pe ar c'hantadoù ha kantadoù a gumuniezhioù bihanoc'h-bihanañ ha toc'hor, kumuniezhioù ar vrezhonegerien ziwezhañ a ziwar ar maez, dizesk war o yezh, kabac'h, oc'h ober o zalaroù hag o komz galleg ouzh o bugale, pe neuze ur gumuniezh leun a startijenn, troet ouzh an dazont, o chom e kêr peurliesañ, o komz brezhoneg kement ha ma c'hellont, ouzh forzh piv, desket war o yezh, gant ur raktres evit o bro ?

Neuze an eil rummad a dud-se, an hini nemetañ a dalv ar boan komz diwar e benn amañ d'am soñj, a roio un dazont d'hor yezh, a raio ur

⁷ Gouleviañ : levianañ/deren/bleñañ dre zindan (gou- a gaver e goulakaat, gouwelout, goubenner...) Gg : manipuler.

genyezh gant dibaboù na blijint ket alies d'ar c'hlaneyzhourien. Neuze, ya, gwir eo, e chomo atav diforc'hioù didec'hus etre an doare da skrivañ hag an hini da zistagañ ar brezhoneg. Setu aze dres perak d'am soñj ne felle ket da Roparz Hemon degemer ar ZH e 1941 : ar gwenedeg a oa peuzvarv dija e kornioù bras a vro-Wened, evel kornog ledenez Rewiz da skouer hervez Herriou e-unan. Ar Wenedourien kar o bro n'o devoa da zever nemet dilezel o zammig rannyezh evit mad ar brezhoneg unvan bet diazezet e 1912 war ar c'hKLT. Se ne oa ket reizh-reizh rak pinvidigezhioù dibar en deus brezhoneg Gwened. Ha setu penaos e voe graet ar c'hKLTG, pe emglev ar ZH, e 1941.

Roperzh ar Mason a skrivas neuze ul levrig talvoudus-tre da heul emglev 1941 war ar reizhskrivadur. Penn-da-benn em eus e lakaet war ar Wikipedia brezhonek evit diskouez mat gwir youl Roperzh ar Mason : derc'hel d'ar brezhoneg-Gwened hengounel evit ar Bobl dre ma ne oa ket gouest da gemm doare skrivañ nag en em ober ouzh lennegezh Gwalarn a rae gant ur brezhoneg 'uhel', pell mat diouzh o hini, hogen hepken evit ar vegenn siwazh. Un oberenn evit ar rummadoù da zont e oa evit gwir. Mennad 1941 a oa TOSTAAT, tammig ha tammig ouzh ur brezhoneg ETRE. Sed ar pezh a felle da Roperzh ar Mason, Langleiz, Roparz Hemon hag ar re all : ur genyezh a zegemerfe pinvidigezhioù brezhoneg-Gwened, dreist-holl evit an ereadurezh, ar gerioù dianav, studi ar yezh, hag all.

Hogen sklaer e oa d'an holl e 1941 ar pezh n'eo ket splann ken evit kalz a dud er mareoù-mañ : war*zu ar genyezh e rank an holl mont, klask tostaat an eil diouzh ar re all, freuzañ mogerioù ar rannyezhoù. Evel-se pa weler daou zen eus "ar bobl" o klask komz kenetrezo, ez eont peurliesañ e galleg pa n'en em anavezont ket. Hogen ma krog unan da vrezhonegañ, ha ma vez bolontez vat ganto o-daou, e kavont dindan berr amzer ur genyezh kenetrezo : diaesoc'h e vo atav eget gallegañ, a-dra sur, met tu a vo, evit traoù eeun da vihanañ. Ganin e c'hoarvez alies dre ma klaskan gouzout bep tro penaos eo o brezhoneg gant ar re a gejan ganto. Ur pleg eo : ne gredan ket e vefe ur si. Peurliesañ e vez laouen an dud gant-se.

En hevelep doare ez eus ur genyezh en em ra tamm-ha-tamm etre ar vrezhonegerien desket. Kavout a ra din ez a re bell ganti eta tud 'zo, a ya betek kemm divizout emglev 1941 pa

zegasont a-youl gaer troiennoù diezhomm eus o is-isrannyezh.

Setu aze perak, p'emañ IMBOURC'H anavezet evit bezañ broadelour, hor broadelouriezh n'eo ket tamm ebet an *nasionalouriezh* faskour pe stalinour. Met evel broadelourien e lavaromp he deus ezhomm Breizh eus ur yezh nemeti, ar brezhoneg, ur yezh da adsevel a-gevret gant ar vro hec'h-unan war diazezoù doujus d'an holl hogen gant pennaennoù eeun evel hemañ : hor bro da zont n'he deus ezhomm ebet eus teir yezh nag eus rannyezhoù diamzeret. Ezhomm hon eus eus ur benveg kreñv gouest da empentiñ holl zoareoù ar bed arnevez – anez kaout ur reizh nammet en abeg d'ur benveg-meizañ divat - a-drugarez da holl binvidigezhioù ar brezhoneg, a zo da bennaouiñ en holl rannyezhoù ha roudoù all, koshoc'h eus hor yezh.

Neuze, peseurt ster politikel reiñ d'ar Brezhoneg ? Adsevel ar brezhoneg 'zo adsevel ur benvegeret evit adsevel hor bro, evit ma kano hor yezh-ni meuleudi d'hor c'hrouer, en he doare di-bar, tra ma savimp-ni el ledenez-mañ ur patrom kevredigezh stummet da zurc'hañ an dud war-zu ar mad, kentoc'h eget redek war-lerc'h tungalvoudoù evel "an Ingalded", a zo un idolenn douellus, ha peurvuiañ ur pezh gaou, a bromet deomp an evurusted, met a gas d'an dizurzhioù brasañ : n'eus ken 'met selaou ar c'heleier. Peseurt Ingalded 'zo e Breizh e-keñver Pariz, da skouer ? Pegoulz e kendalc'hor da dremen lost al leue dre c'henou an dud gant lorberezh Ingalded ar C'hallaoued ? N'eus nemet un ingalded etre an holl-dud hag a dalv ar boan : karantez an Aotrou Doue evit pep hini hag a zo divuzul. Ha ne c'houlenn ket Jezuz an Ingalded er bed-mañ, na zoken ar reizhder : chom a raint atav nammet gant ar pec'hed. Nann. Goulenn a ra ma vo ingalet karantez. Emaomp er bed-mañ evit deskiñ karout, ha netra all ebet. Bro ar Sent eo hor bro. Breizh a zo he galvidigezh bezañ bro ar Sent, da lavarout eo adskoulmañ gant hol linenn istorel a-viskoazh, Feiz ha Breizh ; hag evel Kristenien ec'h ouzomp ne reomp nemet tremen war an Douar evit ur chomadenn a-raok mont d'hor gwir vro, bro ar Sent, da lavarout eo ar Baradoz. D'an dra-se e rank servijañ ar stourm evit ar brezhoneg, bezañ ur benveg mat, arnevez, efedus, kaer, evit ur gumuniezh a dud laouen gant karantez an Aotrou Doue hag a roio c'hoant da annezidi al ledenez-mañ da genderc'hel gant avañtur istor hor broad brezhon ha kristen. Hor broad, evel an holl, a zo galvet

da vezañ santel : arabat touellañ an dud. Warbouez he Sent o kanañ meuleudi gant awen o

yezh piaouel, ne chomo netra eus Breizh er Baradoz.

T. Gwilhmod

Disrannañ ar vroad a ra an hinennelouriezh...

Disrannañ ar vroad a ra an hiniennelouriezh, tra ma vez unvanet gant ar vroadelouriezh

Rebechet e vez a-wechoù d'ar Gristeniezh, gant lod er metoù broadelour, tud ha n'int ket dre ret enep-kristen, e vije ar Gristeniezh o vroudañ an hiniennelouriezh, ha dre-se o nac'h tamm-pedamm ar broadoù, kedveno a c'hellfe bezañ kadarnaet hiziv gant lod komzoù ar Pab Fransez a-du gant degemer en Europa an holl "repuidi" o tont eus Afrika pe Reter-Nesañ, en anv un tebet karitez kristen. Gant ar c'hedveno-se en em gavfe an hiniden, e-unan dirak un Doue a varnfe anezhañ evel pa vefe pep hini ac'hanomp un emzivad klok, hep tiegezh, hep kevredigezh, hep broad d'en em stagañ outi. Evel-just e c'hellfe bezañ techet unan bennak a lennfe buan darn eus lizhiri Sant Paol da reiñ boued d'ar forc'hellegezh-se, da skouer : e Lizher d'ar Goloseidi (3: 11) "*Aze n'eus ket anv ken eus Gresian pe Yuzev, den amdroc'het pe diamdroc'h, nag eus Barbar, Skutad, sklavour pe den frank, n'eus ken nemet ar C'hrist a zo pep tra hag e pep tra*". Met ur skeudennadur eo an dra-se, evit lavarout ha displegañ, n'eus muiken a bobl dilennet, a-us d'ar re all, bet prientet evit aozañ hepken donedigezh ar C'hrist. Deuet eo ar C'hrist en hon touez evel prometet abaoe kantvedoù, met evit holl pobloù an douar ha gant ur relijion nevez, evit an holl. Lavaret e vez traoù heñvel gant Sant Paol en e Lizher d'ar C'halated (3: 28), met lavarout a ra ouzhpenn-se : "*n'eus mui-ken na gwaz na maouez*", ar pezh a c'hellfe reiñ c'hoant da speredoù korvigellus da ziogeliñ e oa Sant Paol a-du gant damkaniezh ar "gender"!

Ne vez ket nac'het ar broadoù gant ar Gristeniezh : ar c'hontrol-bev an hini ez eo. St Paol e-unan, lezanvet dres "abostol ar broadoù", hel lavar fraezh en e lizher d'an Efeziz (3: 5-6) : "*Ar mister-se ha ne oa ket bet diskuilhet d'ar rummadoù-tud en amzer dremenet, evel m'emañ graet bremañ dre ar Spered d'e Ebestel santel ha d'ar Brofeted : kenlodek eo an holl Vroadoù en hêrezh, kenlodek er c'horf, kenlodek er bromesa e Jezuz Krist en Aviel*". En Oberoù an

Ebestel, a-zivout burzhud ar Pantekost (2: 5) e vez graet dave d'ar broadoù : "*Bez' e oa o chom e Jeruzalem, Yuzevion, gwazed deol deuet eus kement broad a zo dindan an neñv*". En Aviel St Mazhev (28: 19) : "*It enta da gelenn an holl vroadoù ; badezit anezho en anv an Tad...*". En Testamant kozh ne ra ket diouer kennebeut an daveennoù d'ar broadoù : En Izaias (11: 12) : "*Sevel a raio er vann ur banniel war-zu ar broadoù, evit dastum harluidi Israel*" ; Izaias c'hoazh (2: 2) : "*En deizioù diwezhañ e vo startaet menez ti an Aotrou [...] ha war-zu ennañ e tiruilho an holl vroadoù*" ; Zakarias (2: 15) : "*Hag en em stago broadoù niverus ouzh an Aotrou en deiz-se, hag e vezint eviti e bobl*" ; Mikeas (4: 2) : "*Dont a raio broadoù niverus hag e lavarint : Deuit ! pignomp da venez an Aotrou*" ; Salmoù (22: 28) : "*Hag e stouo dirazañ holl rummadoù ar broadoù*".

Kalz menegoù all a c'hellfe bezañ kavet er Bibl a-zivout ar broadoù, hogen spletus a-walc'h eo ar menegoù-mañ evit diskouez n'emañ ket ar Gristeniezh a-enep ar broadoù. En diac'hin e felle d'an Aotrou Doue kaout broadoù niverus war-lerc'h bezañ bet distrujet Tour Babel ha mesket lavar an dud evit o rediañ d'en em zispartiañ ha poblañ en-dro an douar a-bezh. Ha Jezuz, a welomp o kas e Ebestel da gelenn an holl vroadoù, ne oa ket evit o distrujañ, met evit ober anezho broadoù kristen, na mui na maes.

Neuze, ouzh ar re a irienn evit sevel ur gouarnamant-bed o tistrujañ war-un-dro ar broadoù, e c'heller lavarout ez int enep-kristen, seul vui ma weler an holl aozadurioù bedelour, mui pe vui dindan baeroniezh an ABU (ONU), o pennluskañ an holl oberiezhoù a zistruj an tiegezh, ar gevredigezh, ar broadoù dre vras, da lavarout eo : ar sioc'hanerezh, an dimezi heñvelrev, ar gender, an helazherezh⁸, an enbroerezhioù a-yoc'h... Ent-diac'hinek⁹, a-zivout o eneberezh ouzh ar c'hemmoù kevredigezhel a-vremañ, ne vuker ket an Islam evel ma reer evit an Iliz katolik, daoust d'an

⁸ Helazherezh : euthanasie.

⁹ Ent-diac'hinek : paradoxalement.

Islam bezañ enebet outo a-grenn, en un doare kalz feulsoc'h eget an Iliz. Kounaomp mesbukad Orlando e Florida, USA (49 den lazhet), hag ar Prezidant Obama, en e areizhoù-harpañ d'ar reuzidi, a nac'has envel an islamouriezh evel kiriek eus ar lazhadeg-se, hag a gavas gwelloc'h tamall an armoù-tan a zo e gwerzh-dieub en Amerika. Un abeg a zo da gement-se : ne anavez ar Vuslimiz nemet ur Vroad : an "Oumma" (kumuniezh ar gredourion), hag ul lezenn hepken evit an holl Vuslimiz : ar Charia. Prientiñ a reont an hent d'ar vedelourion a-benn ar fin, peogwir emaint o tistrujañ Stadoù Europa gant an enbroerezh muslimat a-yoc'h, gant asant renerion Europa, a zo mevelion ar vedelourion.

Bet eo bet an Dispac'h gall, en orin meizad an hiniennelouriezh pa embannas "Gwirioù Marden hag ar c'heodedad", bet awenet gant prederourion ar Sklerijennoù, hag a zistage an hinienn diouzh ar gevredigezh ma oa perzhiek enni. Fellout a rae dezho distrujañ ar bed kozh gant kement tra a yae d'ober anezhañ, ha krouiñ ur bed nevez hag un Den nevez.

Evit terriñ ar sternioù kozh, n'eus netra par eget reiñ anvioù nevez d'an traoù, hag an dispac'herion c'hall a voe mistri war an danvez-se. Diverkañ a rejont ar provinkoù¹⁰ dre o rannañ e departamantoù, gant prefeded e penn pep hini, hag dre reiñ dezho anvioù lu a-wechoù hag a vez daskemmet¹¹ c'hoazh, daou c'hant vloaz war-lerc'h, war c'houlenn o annezidi a chom displijet ganto (gwelout e Breizh *Côtes du Nord* ha *Loire Inférieure*). An daraez¹² degaset er boblañs gant an daskemmadurioù dispac'helse, n'eo ket tost da baouez. Pa-z eo bet krouet rannvioù gant ar gouarnamant gall e 1982, war c'houlenn, peurgetket, ar rannvroelourion, ma oa lod mat Breizhiz en o zouez, ne voe tamm ebet evit derc'hel kont eus ar provinkoù kozh, en enep-kaer, rannvioù danzeek a-grenn a voe stummet gant kalvezvelourion¹³ Pariz, hag ez eo evel-se ma voe muturniet Breizh o koll Bro-Naoned. Nevez 'zo, 2014, ez eo bet krouet rannvioù nevez, brasoc'h, gant anvioù lu a-grenn c'hoazh evit lod, hag o tiverkañ anv Elzas, da skouer, ar pezh a zo ur ranngalon evit an Elzasiz. Breizh n'en deus ket adkavet e unded evit-se, n'eus nemet Normandi he deus adkavet he hini.

¹⁰ Provink : *province*.

¹¹ Daskemmet : *modifié*.

¹² Daraez : *traumatisme*.

¹³ Kalvezvelour : *technocrate*.

Ne oa ket hepken anvioù nevez a veze roet gant an dispac'herion d'an traoù danvezel, an traoù dizanvezel evel an amzer he devoe he lod gant ar c'halander republikan, hag an dud evel-just, pa voe roet dezho an termenoù "*citoyen*" ha "*ci-devant*", evel ma voe roet an anv "*tovaritch*" (kamalad) gant ar gomunourion e Rusia. Eus an hevelep gwazhienn e teu hiziv ar mod nevez e Bro-C'hall da ziverkañ "Gouel ar mammoù" evit he envel "*Gouel ar re a garomp*", evit chom hep feukañ ar vugale o deus div vamm pe daou dad, en abeg d'an dimezioù heñvelrev. Heñvel evit "Ehanoù Pask" ar skolidi, "Ehanoù an Hollsent" pe "Ehanoù Nedeleg", o tont da vezañ "*Ehanoù an nevez-amzer*", "*Ehanoù an diskar amzer*" hag "*Ehanoù ar goañv*". Kement-se evit diverkañ Pask, an Hollsent ha Nedeleg. Na zisoñjomp ket e oa an dispac'herion enepkristenion douet, hag o doa gourbannet "*Bonreizh trevourel ar Gloer*", evit derc'hel an Iliz dindan gazel-gae, da c'hortoz he zistrujañ penn-da-benn diwezhatoc'h, hag e komprenomp gwelloc'h neuze komzoù Vincent Peillon : "*La Révolution française n'est pas terminée*", talbenn unan eus e levrioù.

Hogen ar benveg gwellañ evit krouiñ an den nevez a voe ar "Skol Republikan" hag ur skouer vat hon eus gant hentenn an dispac'hour Léonard Bourdon a ziogele : "*Ne zere an deskadurezh tiadel¹⁴ e nep doare ouzh ur boud bet ganet evit ar gevredigezh*". Krouiñ a reas an damkaniour jakobinat-mañ "*Skol Diskibion ar Vammvro*" a awenas luskad desavadurel an dispac'herion, hag evit diskouez splann e zamkaniezh e klaskas emzivadeg evit e skol. Aesoc'h e oant da levezonañ ha da dreuzkenteliañ¹⁵, peogwir ne oa ket ar gerent etre ar vistri hag ar vugale, evit o dislavarout. Aze ez adkavomp, daou gantved diwezhatoc'h, an hevelep komzoù e genou V. Peillon, N. Belkacem, Ch. Taubira, pa lavaront ez eo ret "*diframmañ ar skoliad diouzh e holl savelegouriezhoù¹⁶ tiegezhel, kenelel, sokial, kefredel*". E-pad pell o deus ar Vrezhoned darempredet Skol ar Republik hep bezañ re levezonet ganti, dre ma oa o kevezañ ganti ar skol gatolik, a oa kreñv, hogen ivez dre ma oa ur gevredigezh plouezad bev-mat a adkemere ar re yaouank war he barlenn diouzhtu e dibenn ar skol a veze paouezet ganti alies ken abred ha

¹⁴ Tiadel : *domestique*

¹⁵ Treuzkenteliañ : *endoctriner*.

¹⁶ Savelegouriezh : *déterminisme*.

daouzek vloaz. Pa voe hiraet ar skol betek c'hwezek vloaz, ha da c'houde, gant ar skolaj hag al lise evit an holl, en em gavas ar re yaouank kalz muioc'h dindan levezon ar Skolioù republikan, seul vui ma voe heñvelekaet outi ar Skolioù emanvet c'hoazh katolik war-lerc'h efedoù ur gomprenadurezh spontus eus Goursened Vatikan II, ha brizh-dispac'h miz Mae 1968 da heul. Diwar an traoù-se eo e kreskas da vat dilezidigezh ar pleustrerezh en Iliz gant ar re yaouank hag o zud, foulet gant emdroidigezh re herrek ar stuzioù, o deus lezet da vont, hag en em gavomp hiziv gant ur vro bet kristen-skouer n'eus ket pell 'zo c'hoazh, oc'h en em reiñ d'ar sevenadur republikan gall, e oa bet stourmet ken start a-enep dezhañ gant hon hendadoù.

Heñvel eo bet an traoù gant an Emsav a-vremañ en deus dilezet broadelouriezh ar rummad kent evit degemer ar sokialouriezh a oa bet hadet gant ar sevenadur republikan-se e penn pep hini, ha se a-raok miz Mae 68 zoken, alies-mat. Degemer ur gealiadurezh a c'hourbann e oa bet ganet ar bed d'ar wir vuhez e 1789, pa veve a-raok e teñvalijennoù eus an teñvalañ, ha diazezañ ar benngadouriezh politikel war stourm arvarus ar renkadoù n'eo ket eus ar siriusañ nag eus an efedusañ evit dieubiñ Breizh. Degas a ra kentoc'h ur devouder a zisrann pa-z eo endev tiegezhioù ar vro en ur stad a ziempradur, gant hor re yaouank a zo rediet da vont da bellvro evit kavout labour en abeg d'ar vedelidigezh (gwelout war ar gudenn-se pennad T. Gwillmod e K.I. 95).

Diazezañ ar stourm war istor Breizh a ra ar vroadelouriezh, rak ezhomm hon eus anavezout mat hon tremened evit aozañ ar bremañ ha prientiñ an dazont. Disteurel Feur-Emglev 1532 da skouer, bet gwallet gant Bro-C'hall hepken, evel un dra gozh da deurel d'ar blotoù, ha degemer an demokratelezh hepken da reizhabegadur ar stourm-dieubiñ, kement-se a gas d'un hent-dall. Ur vroad kozh eo Breizh, krouet eo bet bremañ ouzhpenn eget pemzek kantved 'zo, gant menec'h koulz ha gant tierned kadarn a vez miret an eñvor anezho gant hon

Istor : Konan Meriadeg, Morvan, Gwihomarc'h, Gradlon, Judikael, Nevenoe, Erispoe, Paskweten, Salaün... Anvioù sent Breizh n'eo ket hepken anvioù seizh sant an Tro-Breizh, kantadoù ez int evit gwir, hag an darn vrasañ ne oant ket bet kedanavezet gant Roma, met enoret int bet gant ar Vrezhoned, evit ar mad o deus graet dezho, hag an darn vrasañ eus ar parrezioù hag ar c'hêriadennoù e *Plou, Lan, Lok, Gwik, Tre, Kêr*, a zoug o anvioù illur evit ar beurbadelezh. Dleout a rafe an dra-se komz ouzh kalon ar Vrezhoned, ar rummad yaouank dreist-holl bremañ, ha lakaat lorc'h enno p'o devez hendadoù ken kadarn ha ken kalonek. N'eo ket bet desket an Istor-se d'ar Vrezhoned gant ar Skol C'hall, evel-just, met roll an Emsav a oa d'hen ober da stankañ an ezhomm hollbouezus-mañ, kentoc'h eget komz dezho eus damkaniezh marksour stourm ar renkadoù, he deus devoudet, da heul an dispac'h gall, kantmilionoù a gelanoù hep na oufemp peur e paouezo al lazhadeg.

Adalek an derou ez eo bet Breizh ur vro gristen ha chomet eo bet kristen-tre e-pad kantvedoù ; emañ ar prouennoù dirak hon daoulagad, evel ma 'm eus hen diskouezet uheloc'h, ha mar-d eo klañv hiziv he c'hristeniezh e c'hell bezañ pareet, hag ar c'houlz eo evit parañ. Dirak an arvaroù ouzh hor begozhiñ er mare-mañ gant an Islam a aloub Europa, Breizh n'eo ket gwarezet dioutañ daoust m'emaomp e penn kornokañ Europa. Neuze ez eo poent d'ar Vrezhoned en em vodañ ha goubannañ : "Ur vroad kristen ez eo Breizh, ha n'hon eus ket c'hoant d'ober gant an Islam", evel m'eo bet graet gant broioù 'zo eus Europa ar Reter, evel Hungaria ha Polonia. Ersaviñ o terc'hel kont hepken eus hor c'hoantoù hiniennelour a hiziv, estren d'hor broad, a zo terriñ al liamm milvedel hon ere ouzh hon hentadoù. Dalc'homp soñj eus komzoù hor c'han relijiel koulz ha broadel : "Da Feiz hon Tadoù kozh" : "*Vit feiz hon Tadoù-kozh, hag en-dro d'he banniel, ni holl en em stardo*". Daoust ha komzoù goulo e vefent deuet da vezañ hiziv ?

Donwal Gwenvenez

Studi war "Island" gant Huxley 2/2

Ha soudarded Rendang-Bleiz n'emaint ket en "tu-dehou" kennebeut. Mall a zo warno ober kenwerzh gant kompagnunezh ar *Standard Oil*, peadra da bremañ armoù digant ar yoc'h soviedel ha

kas da benn o hunvre "dispac'h peurbadel". O mestr, ar c'horonal Dilpa, a zo un doare Hugo Chavez a-raok ar c'houlz. E zispac'herezh arnevez a ziskouez dremm all ideologiezh "yaouankour" ar bloavezhioù

60 : an tu feuls ha gwadek, tu ar *Black panthers*, tu Ho-Chi-Minh, tu Fidel Kastro. N'eo ket gant enebourion e voe distrujet Pala ; gant an emzislavar en hec'h ideologiezh, ne lavaran ket, falsat ideologiezh ez eus bet biskoazh, ideologiezh an tu kleiz norzhamerikan er bloavezhioù 60, a c'hourbanne stourm evit "peoc'h ha karantez" hag a sikoure gant sevel un tammig e pep lec'h er bed "Ur vietnam, daou vietnam, tri vietnam, ha kendalc'homp ganti ..."

Heverkoc'h c'hoazh, e orin mennozhioù utopek Pala e kaver restachoù boudaegezh tantrek, mesket gant emdroerezh bevoniel bet degaset eno gant ur mezeg skosat, hanter ouizieq hanter doueller, ha deut da vezañ brudet en enezenn abalamour ma oa deut da benn da bareañ kleñved kevrinus ar roue dre "magnetizerezh loenel". Magnetizerezh, boudaegezh direizhkredenek, emdroerezh : emaomp c'hoazh gant *téosophisme* an Itron Blavatski amañ. Setu eo heñvel-mik gwrizioù utopienn anarkour Pala ouzh re soudardelerezh Rendang-Bleiz.

Hag aze ez eus c'hoazh ul liamm etre irienn ar romant hag an Istor : *Téosophisme* an Itron Blavatski, anezhañ ur brizh-relijion ijinet e Londrez gant un dorfedourez rusat, a voe arveret a-hend-all gant an impalaerouriezh saoz evit breinañ hengounioù diles broioù ar reter, peadra da aloubiñ anezho aesoc'h¹⁷.

A-fed ideologiezh, neuze, Pala n'eo ket gwelloc'h eget Rendang-Bleiz. E eilvet pennad ar romant, ar peñsead Will Farnaby, strafuilhet gant an dañjer bet treuzet nevez' zo gantañ, a zo pareet eus e boanioù-spered dre ur bredvezegiezh ijinet war an tomm gant ... ur plac'hig nav bloaz. Mari Sarojini MacPhail hec'h anv, ha merc'h-vihan eo da vezeg-meur an enezenn. Hewel-mat warni holl ar c'healioù arbennik en enezenn a-fed deskadurezh ha divez : mennozhioù ar "wirionded", "bountañ an holl fromoù er-maez diouzhtu", "kizidikaat", an "emvodoù evit parañ", an "dieubidigezh". An holl vennozhioù-se a loc'has kuit eus Esalen e Kalifornia hag en em ledas dre an hollved, o lezel ur merk hewel-tre war ar bloavezhioù 60. Fest-meur an arnodennoù-bredel evit "em zieubiñ" a grouas en diwezh impalaeriezh etrevroadel an drafikerion-dramm ha kreskidigezh an torfederezh-graet-gant-yaouankizoù en ur walenn ne c'hell mui den ebet herzel outi. Ur bed nevez a yec'hed hag a emlusk a brometed koulskoude d'an ampoent. Rac'h bugale Pala a zo boaziet da "ezteurel o holl fromoù", da lavaret eo diskouez diouzhtu ha divezh o holl mennadoù pe santimantoù fall, peadra da argas kuit an holl zañjer er mennadoù-se sañset. An "ezteurel-fromoù"-se, pa voe kelennet e kouentoù

¹⁷ Sl. Peter Washington, *Marmouz an Itron Blavatski*, ha René Guénon, *Le Théosophisme. Histoire d'une Pseudo-Religion*, Pariz, Éditions Traditionnelles, 1929 (adembannet e 1978)

gant bredvezeion -"dieuberion" e "emvodoù evit parañ", a lakaas selaouerezed a-vil-vern da garanteziñ ouzh ar brezegennered ha da zilezel o c'halvedigezh, ken e voe damzistrujet meur a urzh relijiel gant se. A-unan gant ar c'hiz brizh-reterel, an "dieubidigezh" bredvezegel he deus graet da vilionoù a re yaouank dilezel ar gristeniezh evit em reiñ da skarennoù torfedourrien evel *Love Family* a redie bugale pevar vloaz da genorgediñ gant o c'herent, kement-se en anv ezteurel dieub an holl fromoù. Biken ne vo gallet muzuliañ pegement a zroug a zo bet graet da vred ar rummad-se. An holl dristidigezh hag an holl vezh berniet er c'houstiañs a zo sanket re zon evit dont er-maez peurliesañ. Renabloù spouronus a gaver a-vil-vern er miliadoù a glinikennoù a-ratozh evit izili skarennoù aet da foll. An darn vuiañ eus ar c'hlinikennoù-se a zo lec'hiet a-hed arvor gornog ar Stadoù-Unanet, an tachad a c'hanas warnañ ar promesaoù nevez a yec'hed, peoc'h ha karantez¹⁸.

Ul liamm a vez atav etre ar wrizienn hag ar frouezhenn avat, hag an efedoù spouronus-se n'int ket c'hoarvezet dre zegouezh. En imbours'h soudardelour war vrezel bredel ha drouktunerezh emzalc'h an dud, eo e voe ijinet an "emvodoù-evit-parañ". Unan eus gouiziegion-veur ar skiant-se, Kurt Lewin, en doa dizoloet er bloavezhioù 40 dija penaos ar brouderezh luziet ha diweladus gouzañvet gant un hinienn en ur stroll a zo an doare efedusañ da lakaat an emzalc'hioù da gemm. Komprenet mat ar gentel-se gant Karl Rogers, Fritz Perls, Abraham Maslow hag ar re all o deus ijinet an "emvodoù-evit-parañ" er bloavezhioù 60. An "dieubidigezh" a oa benn ar fin an doare da lakaat an dud da asantiñ da gemmoù nevez. Lewin hag e heulierion o doa dizoloet neuze ur c'halvezerezh evit bezañ mistri war an dud, ur c'halvezerezh mil gwech efedusoc'h eget kement a veze arveret e *Brave New World*. Evel ma anzave unan anezho, Robert Blake, bet skoliad da Lewin en *Tavinstock Institute* e Londrez : `` Kaer e vo da genilour emvodoù a-seurt-se en em ziskouez evel divennad, kreñvoc'h c'hoazh e vo e c'halloud a se eget hini ar groñsrener reutañ, peogwir e chom kuzhet an holl veli hag an holl levezon¹⁹.'' Ha Blake en doa renet emvodoù evel-se er *Standard Oil* just awalc'h, an hevelep anv-kompagnunezh hag er romant : gwelit peseurt taol-degouezh! Peseurt arouez, pa lavarin mat.

War-lerc'h bezañ arvestet ouzh un emvod evit "kelenn ar garantez" da vugale Pala, e klemm Will

¹⁸ Ur studi sebezus war ar freuzerezh bredel-se deut diwar arnodoù bredel ar bloavezhioù 60 a gaver e Flo Conway e Jim Siegelman, *Snapping. America's Epidemic of Sudden Personality Changes*. New York, Lippincott, 1980.

¹⁹ Restadenn e E. Michael Jones, *Libido Dominandi: Sexual Liberation and Political Control*, South Bend, St. Augustine's Press, 1999.

Farnaby, ar peñsead nevez-degouezhet en enezenn : "Pavlovezh ha netra ken!" Ar c'henilour, heñvel e doare ouzh hini ur santig, evel kement a walc'herion-empenn er bloavezhioù 60, a respont : "Pavlovezh? Hag ez eo. Pavlovezh mennet mat nemetken avat. Pavlovezh evit ar vignoniezh, ar fiziañs, ar gendruvez."

Gevelled eo ideologiezh Pala ha groñsveli Rendang-Bleiz neuze, dre o orinoù blavatskiek koulz hag o doare luziet da ren ha levezoniñ an dud. Drama an Enezenn n'eo ket hini ur baradoz a frankiz distrujet gant armeoù mennet fall : drama emzistruj un utopienn gaouiadez bet goloet gant gerioù kaer, ne lavaran ket.

E prantad fromusañ an dezrevell, Will Farnaby, kendrec'het en diwezh gant "religion hep dogmennoù" ar balaiz, a ra e soñj arnodiñ ar *moksha*, ar blantenn deogus a zichal an debrer anezhi, evel ar *soma* e *Brave New World* ; muioc'h e ra avat : digeriñ a ra sañset dorioù an anaoudegezh klok ha peurv. Setu Will o stagañ gant e daol-arnod, hag er penn-kentañ e "wel ar gouloù", pe e soñj dezhañ gwelout atav. Beuzet eo en un eurvad dispar ha krediñ a ra dezhañ gwelout Doue e-unan zoken. Ar gwel a gemm a greiz-holl. Digeriñ a ra dorioù an ifern : preñv bras-euzhus a zeu war-wel, mesket gant Adolf Hitler o jestraouiñ hag o vlejal. Gwel Will a lak anat gwir natur kravez Pala : ur gravez diwar "arnodoù breidel", dic'houest da drec'hiñ an daouegezh vedoniell ha tizhout ren an diamzer. Relijion an "emvodoù-evit-pareañ" eo, a zo bet klasket lakaat e-lec'h ar relijion gristen gant politikerion paotred-o-c'houlz. Kerkent ha ma tihun Will eus e hunvre e klev tennoù kentañ an armeoù oc'h aloubiñ an enezenn : gaoù meur Pala a steuz kuit war un dro gant ar falswel speredel.

N'eus ket kalz a levrioù o deus komprenet ken don emdouelloù renkad ar grez ez int bet embannet ennañ. E-keñver kalvezderioù-touellañ *Island*, re *Brave New World* a seblant bezañ hegreidik ha diaoz. Memes mod, gwall ziglok e seblant bezañ groñsveliouriezh hewel ar bloavezhioù 30 e-keñver drouktunerezh-an-emzalc'hoù er bloavezhioù 60. An deznaou didruez war ar sklavekaat-ar-bredoù ne c'halle ket bezañ komprenet gant e gempredidi. Beuzet ma oant e hoal ar gaoù nevez c'hanet, diougan Huxley a dremenas uhel-uhel a-us d'o fenn.

Hiziv avat e vevomp er bed krouet gant an "idealourion yaouank"-daonet-se er bloavezhioù 60. An arnodoù evit bezañ mestr war vred an dud ne chomont mui etre bevennoù strizh un emvod prevez ur wech an amzer ; a-vevomp e vezont lakaet dre heg war ar vugale er skolioù foran, hervez ar pezh a vez anvet "*Ministère de la réforme psychologique*" gant Paskal Bernardin²⁰. Evel Mary Sarojini MacPhail, an holl vugale a c'houzañv heskinerezh luziet ar stroll, hag en diwezh en em roont d'un emzalc'h resis prientet e burevioù, hep diskrediñ morse e c'hallfe bezañ emzalc'hoù all. Er Stadoù-Unanet eo hewel dija heuliadoù an doare-kelenn-se arveret a-vil-vern : gant ar sifroù uhel-spouronus a-fed emzramerezh ha torfederezh er skolioù foran e vez gwelloc'h gant kalz kerent desevel o bugale er gêr. Tud maerdi New York, anzavet ganto ne ouzont ket penaos herzel ouzh feulster ar vugale, a zilez meridigezh kalz eus o skolioù foran hag a fiz anezho en ur renerezh prevez. E Brazil emañ c'hoazh ar prosed-se en e zerou, met a-walc'h eo lenn ar "Programoù skolel broadel" e Maodiernva an Deskadurezh evit merzout ez eo trec'h-mat eno an drouktunerezh breidel war ar stummadurezh kefredel-divezel. Aloubet eo bet ar gelenouriezh er bed-a-bezh gant spered an "emvodoù-evit-pareañ" er bloavezhioù 60, mennet start da "zieubiñ" ar vugale eus an hêrezh kristen. Pa vo gwelet dremm all an "dieubidigezh", pa ziskouezo Pala eo unan gant Rendang-Bleiz, e vo gouelvan ha skrignerezh-dent. Met evel er bloavezhioù 60, ar re a zo pennkaoz d'ar walenn ne anzavint netra dezho o-unan : pep hini anezho a c'hourbanno bezañ un idealour trubardet gant red dirakweladus an Istor, hag azbevaet gant o c'houstiañs-vat e prientint hardizh ur raktres nevez evit ur "bed gwelloc'h".

Aldous Huxley en deus skrivet al levr-mañ evit diskouez deomp peseurt kabusted euzhus en em guzh war-dreñv diantegezh an idealourion.

Olavo de Carvalho, d'ar 22 a viz Ebrel 2001.

Brezhoneg gant **Ewan Delaney**, skrivet evit ar wech kentañ evel raskrid da adembannadur brazilian *Island* gant an embannadurioù *Globo* e 2001.

²⁰ Sl. Pascal Bernardin, *Machiavel Pédagogue ou le Ministère de la Réforme Psychologique*, Pariz, Éditions Notre-Dame des Grâces.

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

Nevez 'zo ez a gwelloc'hik gant an Oferennoù e latin e Penn-ar Bed. E Kastell Paol, e chapel Sant Jozef (bet savetaet gant Philippe Abjean, eus an Tro Breiz), e vo hiviziken un Oferenn bep Sul da 18e. Klevet hon eus ivez eo bet lakaet e Lanmeur ur beleg eus Breudeuriezh Sant Pêr,

gant asant an eskob. Gant levr-oferenn ar chaloni Uguen eo aes d'ar vrezhonegerien kemer perzh en oferenoù-se, kentoc'h eget e oferenoù gallek.

Maodiernez an Desavadurezh Vroadel, a zo bet nevez-medalennet, ez-kefridiell, gant ar

Frankvasoned, e-keit ha m'emañ o strishaat ar frankiz-skoliata evit ar skolioù er-maez kevrat hag o tispac'hañ aozadur rolloù-keleñn ar skolaioù adalek an distro-skol a zeu.

Kuzul-Uhel an Desavadurezh C'hall a zo o paouez strishaat c'hoazh ar reolennoù-keleñn war-dro an "Diorroadurezh revel", war-zigarez stourm evit an doujañs hag an ingalded etre Paotred ha Merc'hed.

N'eus ket a zizingalded etre paotred ha merc'hed e-keñver goprou e Frañs. Ar goñchenn a lavare e vez paeet ar merc'hed ur palevarzh nebeutoc'h a zo faos. Ar pezh a zo gwir eo e vez paeet nebeutoc'h-kalz ar maouezed o devez bugale hag ar re n'o deus ket. Hervez ar sifrou, keidenn goprou ar maouezed divugel a sav da 95 % eus hini goprou ar wazed.


Neuze e c'heller lavarout ez eus gwallziforc'hegezh a-enep an tiegezhioù. An dra-se, avat ne vo ket kelennet e stern an "Diorroadurezh revel" e bro a Ingalded.

Lazhadeg Orlando, bet graet gant ur muzulmad en ur voest-noz heñvelrevourien he deus roet tro da glevout kalz mouezhioù kengred gant al lobby heñvelrevour e kañv. Goude-se e oa bet gouezet e oa ar muntrer un heñvelrevad klañv-bred, met kement-se n'eo ket bet brudet avat. Emaomp eta gant afer drist un den a zo muntrer en abeg da zigempouez e vuhez revel, gant ur relijion n'eo ket gouest d'e sikour, a-benn ar fin.

Maer nevez Londrez a zo a orin afghan, hag adu da chom er C'henvarc'had. Goude ar Brexit e c'houlenn lod e Londrez he defe Londrez he dizalc'hiezh da c'hellout mont er-maez eus... Bro-Saoz, ha chom en U.E. ! E-keit-se e ra kement-all kentañ maodiernez Bro-Skos.

Kembre kembraeger (Caernarvon) he deus votet ivez evit chom en UE. Poltred an dud o deus votet evit ar Brexit a zo : un saoz diwar ar maez, aet kozh, paour a-walc'h.

Al lobby LGBTXYZ a c'houlenn na vefe ket mui dispartiet privezioù ar baotred diouzh re ar merc'hed, evit stourm a-enep ar patromoù kozh. Ur vaouez a lavar ez eo ur paotr a oa dizolo he divronn en ur poull-neuial en Izelvrioù. Kaset e oa bet er-maez gant renerezh ar poull-neuial en abeg d'an emzalc'h-se. Douget klemm he deus an dreuz-revez, ha gounezet el lez-varn. E bro Alamagn ez eus ur c'hannad en deus kroget e areizh e Breudoù Brandenbourc'h o saludiñ 60 rummad-tud : an heñvelrevourien, al lesbiadezed, an androgined (pil-paotred pe baskarin-ed), an daouevaded, an dreuzjeneraded, an direvaded, an hollrevaded, an neptujeneraded, an daoujeneraded, hag all... C'hoarzhadeg 'zo bet peogwir e verke mat aze ar c'hannad pegen lu eo arc'hadurioù al lobby-se.



Buhez hon Emglev

- klask a reomp kenlabourerien evit skriverezañ notennoù Ar Bibl emaoomp o prientiñ.

- Katekiz ar Vugale, diwar un dornskrid gant Turiav Ar Menteg, a zo prest. 250 p. 120 skeudenn e liv. Skrivañ deomp.

Levrioù da rakprenañ

- Lavar 19 e ti Preder, kendalc'h an notennoù-labour a denn da c'heriadur Martial Ménard, Geriadur ar Gimiezh, Geriadur ar vezekniezh h. a. 21 €franko a-raok hanter miz Gouhere.

- Geriadur an Doueoniezh Turiav ar Menteg gant an Treizher 13 €franko a-raok dibenn miz Gwengolo.

Mererezh :

16 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X